

Merer (Lokireg 1843 – Montroulez 1890) **Da wazed yaouank Lanneur**

Bet savet e fin an XIX^{ved} kantved

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Eur bern geriou galleg brezonekaet a zo e-barz ar skrid-mañ. Aliez e vez red gouzoud galleg evid kompren. Iskiz-kenañ eo an doare-skriva orin.

Chanson nevez Kompozet Da wazed yaouank Kanton Lanneur

War eun ton galleg

Me ho supli, Gwerhez gloriuz Vari, hag he Mab benniget,
Diganeoh e houlennan sklêrijenn d'am spered,
Ma hellfet rei din ar pouvoar hag ivez ar buisañs
Evel m'en-devoa sant Louis pa oa roue er Frañs.

Em-ije implijet va amzer da zoned da rima,
Sklêrijenn d'am daoulagad ma teuin da skriva,
Selaouit a galon sperejou a zo parfet,
Etrezoh tud yaouank ne vefet ket daleet.

Me ho supli, Bretoned, prestit hoh intañsion
Da gleved kana eur giniad truezuz a doucho ho kalon,
Eur giniad leun a hlahar, deuz an druezusa,
'Zo kompozet a-nevez evid ar bloaz-mañ'.

Deuz a-berz or mestrou ' eo deut ar gomandamant
Da denna d'ar billed¹ evid ar bloavez prezant,
'Barz er bloaz mil eiz kant ha tri-ugent
D'ar zeiteg a viz c'hwevrer, 'vid rei deoh da entent.

War-dro kreisteiz hanter pe eun eur d'an hirra,
'Oa sonet an daboulin dezo d'en em renta ;
En em renta a ra ar baotred yaouank e Lanneur prontamant,
Pa rankont akomplisa design ar gouarnamant.

D'ar zeiteg a viz c'hwevrer a zo tremenet,
Ar baotred yaouank o-deus tennet ar billed.
Kuitaad a rankont ha mond er-mêz ar vro,
A ! Doue o honduo e leh ma teziro.

¹ Da denna d'ar billed : tennet e veze ar billed gand ar baotred evid mond d'an arme.

Tud yaouank deuz an arme, deuz ar re derrupla,
Glaharet eo o lignez p' o gwelont o partia,
Da bartial er-mêz o bro da vond gand an nasion,
Ema beuzet a zaelou o zud gand an dezolasion.

Kriz 'vije ar galon da ouela ma na deuje
E-barz en kanton Lanneur bremañ neb na vije
O weled an dud yaouank, o lignez beuzet a hlahar,
An daelou en o daoulagad o hlebia an douar.

Pa oant bet galvet 'vid doned da denna
E komañsas o oll izili da zoned da grena.
Kement-se 'oa eur skwer e rankjent moned d'an arme.
Skuilla 'ra daelou o daoulagad ha ne reont ket heb sujed.

Me a zisklêrio deoh beteg fin ar breuvenn²
Ar hlahar a zo bremañ e-touesk ar Frañsizien
War ar sujed demeuz ar Revolusion
E rankont kuitaad da vond gand an nasion.

An dud añañsienna³ a zo war ar bed-mañ
N'o-deus ket gwelet biskoaz ar pez a zo bremañ
E rankay ar wazed gard⁴ mobilizet kuitaad o bro.
Me a gred e vezo mantret oll, kement a glevo.

Kriz 'vije ar galon ma ne deu da ouela,
O kleved aneze deuz en em gimiada.
Ar gard mobilizet leun euz a velañkoni
Pa'h eont deuz ar Brusianed da gombati.

An amzer evuruzamant a ya da veza tremenet,
Va halon 'zo lañgisant pa'h eom-ni da veza separet,
Amzer ha laouenedigez a rankom eta dilezel,
Bremañ ez om leun a dristidigez o kuitaad Breiz-Izel.

Deut eo ar Brusianed war douar ar Frañsizien,
Ha ni a guita or bro gand glahar hag anken,
Goude lakaad 'n on flas d'ober servij ar gouarnamant
E rankom ho tilezel ha mond war-lerh on arhant.

O zud hag o lignez 'zo komañset da ouela
O kleved aneze deuz en em gimiada,

² ar breuvenn : ar brouenn.

³ añañsienna : kosa.

⁴ gard : ar ger galleg.

Ha pronoñs ar ger e rankjent en em guitaad,
O ! kement o hlevo o-devezo kalonad.

Tadou ha mammou hag ho lignez 'zo dezolet.
Breudeur ha c'hoarezed 'zo glaharet,
Hag or halonou en or hreiz a zo kazi rannet
Pa rankom kuitaad ar re o-deus or maget.

Kenavo, tadou ha mammou, pa rankom kuitaad,
Hag or breudeur ha c'hoarezed tener ha mad,
Kerent hag anaoudezeg, gand eur galon hlaharet,
Pa rankom kuitaad 'vid mond d'ar Brusianed.
Tadou ha mammou a lavar d'o bugale :
« Deut c'hoaz d'or ambrasi kent ma'h et⁵ d'an arme,
Deut c'hoaz etre on divreh eur wech kent eged mervel,
Ni m'om ken an avañtaj pa rankom ho tilezel. »

Mond a reont an eil hag egile 'vid ar wech diweza ,
An daelou en o daoulagad a deu da izilla.
An daelou a deu da izilla deuz o daoulagad,
Ha kement a glevje 'nije glahar ha kalonad.

O zadou dezolet a lavar en eur ouela
« Aotrou Doue, va bugale gêz bremañ 'rankom partia,
Bremañ 'z eo red on abandoni ha mond deuz ar gêr,
Ne chomfet ket ganeom d'or soulaji en or mizer.

Or halonou 'zo fraillet dre nerz o huanadennou,
Hag on daoulagad 'zo beuzet en eur mor a zaelou,
Allaz ! deut eo an devez ma rankit or huitaad,
Ha kement ho klevo amañ 'devo sur kalonad.

Ma ne deuit ket da weled ar gard mobilizet,
Ni a gred ez oh kruelloh eged an diranted,
Pere gwechall o-devoa bet ar gruelded
Da lakaad d'ar maro or Zalver benniget.

« Red eo eta, kerent ha mignoned, en em zepari,
Pa n'e-meum ket ar boneur d'ho souten en ho kozni,
Al lezenn 'zo didruez ha deut eo an ordrenañs
Ma rankom ho kuitaad hag heuill trouplou Frañs.

Kenavo, oll beredou ha douarou benniget,
En peleh⁶ e oam design da veza intereset,

⁵ et : it.

⁶ En peleh : leh ma

Da ouel an Anaon, klemmuz, ne deuim mui war ho peziou
Da skuilla an dour benniget gand kalz a gañvou.

Kerent hag anaoudegez, on design a zo braz,
Ni 'garfe beza desedet bremañ en ho plas,
Kerkoulz mên-font badiziant, karnel on zud-koz,
Gras deom d'en em weled e gloar ar Baradoz.

Ha daelou o daoulagad a hlebie ar vein be'
Kalz a dud ouz ho kweled, gand glahar a ouele
O weled ar gard mobilizet oh ober o himiad,
Ha marteze hen reont, allaz siwaz ! evid mad.

« Kenavo, beleien hoh-eus or badezet, hag an oll dud a Iliz,
Ar mêt hag an adjoñ memprou deuz an dud a justis,
Ha d'an dud añsien, ha deoh toud kement ha m'om karet,
Ha da ganton Lanneur ha d'e oll abitanted.

Pa'z eo deut al lezenn deuz a-berz ministr ar brezel,
E rankom ho kuitaad pa oar deut d'or gervel
Da voned d'ho tivenn euz an oll enemied
O-deus c'hoant da egzersi warnom o hrueleded. »

« Tavit, tavit, va breudeur, ha na ouelit ket,
Tachit d'en em goñsoli, en em gonformi 'zo red.
Etrezoh, gwazed yaouank, bevet an esperañs.
Doue, tad a vizerikord, a zo braz e brovidañs.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha gounezet ar viktoar
Gand gras Doue hag ar Werhez, 'vo fin d'or glahar.
Gand merk deuz ho vaillantiz, gand kalz a enoriou,
E teufet d'ar gêr 'vid seha piz on daelou.

Me ne esperno ket va foan an deiziou da zoned
Da unisa an overennou evidoh, soudarded,
'Vid ma peh chañch ha boneur da return war ho kiz,
Gand eun drapo loreet gand merk ar vaillantiz. »

Setu ar gard mobilizet konsolet a gomzou charmant,
Hag a lavar an eil d'egile gand eur galon gontant :
« Etrezom, breudeur yaouank, dem kontant d'an arme
Da zikour kerent ha mignoned 'zo en dañjer o buhe' .

Me ho supli, tadou ha mammou, kent ho kuitaad,
Ha breudeur ha c'hoarezed tener ha mad,
Kaoud soñj da bedi Doue hag ar Werhez evidom,

Hag on Êlez vad o-devo soñj ahanom.

Breudeur ha c'hoarezed, pa chomit gante er vro,
Bezit soagn euz on zud beteg eur ar maro.
Meur a wech ganeom o-deus bet veillet,
Ha daelou o daoulagad o-deus glebiet an oaled.

Bremañ pa'z om memprou da Jezuz, soudarded an Aviel,
Bugale da Zoue on Tad, memprou d'ar Spered-Santel,
Etrezom breudeur ha kerent, deom gand enor ha respet,
Deom d'an iliz a Gêr-'n-Itron gand eur galon barfet. »

En iliz Kêr-'n-Itron en em brosternjont d'an daoulin
Dirag ar Werhez hloriuz Mari hag he mab divin.
Juntret gante o daouarn, digor o daoulagad,
O selled 'trezeg an Neñv da houlenn ar mennad.

« Gwir vab d'an Tad Eternel, or Zalver adorabl,
Ni deu d'hoh adori beteg an Tabernakl,
Diskennit mar plij ganeoh warnom eur zell a drue'
'Vid ma 'mom chañs ha boneur da zistrei deuz an arme.

Dreinded santel, prosternet dirazoh d'an daoulin,
Me ho supli da rei sikour d'ho servijerien iñdign.
Va spered 'zo frajil ha va studi 'zo izel,
Sklêrijenn a houlennan ouzoh, Dreinded santeL

Gwerhez Hloriuz Vari, deoh en em adresan,
Optenit deom ar grasou da halloud rezistañ.
Deom, ha d'or breudeur, pa vefom er hombat,
'Vid ma vefom prezervet deuz an tan hag ar gwad,

Diouzoh, Sent ha Santezed, 'n e giniad eom ket⁷,
Esperañs e-mom e vefet deom gwir alvokaded,
Deom ha d'or breudeur pa vefom er broiou estrañjour,
Prestit deom, me ho supli, prestit deom ho sikour.

Evid ma welfom an tañbour-major, e ganenn gantañ en êr
O krial war ar zoudarded vaillant : « Kit bremañ d'ar gêr. »
Neuze e tistrofom d'ar gêr gand kalz a joaiusted.
Kerent ha mignoned 'vezo toud raviset. »

⁷ 'n e giniad eom ket : ?

Reketom eta da gement 'zo desedet
Eh afent da repoz en gloar an evurusted.
Gras deom d'en em weled er palez selestiel,
En ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel ;

Etrezoh, azistanted, ho-peus c'hoant da gleved
Piou 'n-eus chañson ar hiniad-mañ kompozet.
Eur peizant yaouank, ginidig a barroz Lokireg.
E ano Guillaume Merer, 'zo dister a spered.